

AR PILLAOUER

91

Ton anavezet.

Va zad en deuz va dimezet
D'a eur flerious pillaouër, (*bis*)
E Loqueffret ez eo gannet,
E Kommanann Toul-al-Laër.

Foaï, foaï, var va zammic aotrou } *bis*
Gant he stoup hag he billou ! }

Tri devez goude va euret,
En em gav foar Landerne ; (*bis*)
Ha va lapous, prim difanet,
A zav meaz deuz he vele.

Foaï, foaï, etc.

Draila ra eun anter Pater,
Tana ra he gorn butun, (*bis*)
Tapout e ra he grog-poëzer,
Evit mont var hent zizun.

Foaï, foaï, etc.

Ganthan n'em gav camaraded
O vonet da billaoua (*bis*)
He holl arc'hant hed deuz foated
Ha tamm pillou c'hoas n'hen doa.

Foaï, foaï, etc.

Pa oa ann anter-noz sônet
En ilis vras ar Fouille, (*bis*)
Me oa intanvez glac'haret,
Va unan bars va guele.

Foaï, foaï, etc.

Mont e ra d'ar vilin baper
Gant eur zach'adic pillou, (*bis*)
Kals buhannoc'h eget eul laër,
Ha kollet gant-han he voutou.

Foaï, foaï, etc.

Pa'z lannic d'ar pardonniou,
Bepred a ve mezo-dall ; (*bis*)
Prest ez oa da goll he vragou,
E Loqueffret, an deiz all.

Foaï, foaï, etc.

Pa zeuio a c'hiz, er vro-ma,
Da derri an dimeziou, (*bis*)
Me a eillo en eur gana
Pell deuz paotred ar pillou.

Foaï, foaï, etc.

Pa zeui karriguel an Ankou
D'ober he dro er vro-ma, (*bis*)
Me a gerzo war he roudjou,
Hag hen pedo d'er zamma.

Foaï, foaï, etc.

Ha pa dô ann Ankou bontet
Toul fleurion ar pillaouër. (*bis*)
Me a geizo d'hen lavaret
Da gomman Toul-al-Laër.

Maro e va zammic aotrou, } *bis*
Va he stoup ha he billou ! }

Pa vo grêt intéramant
Gant ar paour-keaz pillaouër (*bis*)
A vô kavet, elec'h arc'hant,
Ha zac'h pillou, he grog-poëzer.

Maro e va zammic aotrou, } *bis*
Var he stoup hag he billou ! }

Red vo komz d'ann aotrou Person
Deuz ar paour-keaz pillaouër (*bis*)
Ma vô kanet al Liberon (libera)
Hag ouspenn-ze lip he rer

Maro e va zammic aotrou } *bis*
Gant he stoup hag he billou ! }